




ESSURE : **DROUK MOUGET** **E KORF AR MERC'HED**

UN ENKLASK DA LENN WAR SPLANN.ORG



Abaoc bloavezhioù e c'haller lenn testenioù merc'hed tapet fall o yec'hed goude bout bet lakaet an ensteudoù (implants e galleg) Essure. Hiziv an deiz e kendalc'h da lâret an embregerezh 'neus gwerzhet anezho 'n eus ket kudenn ebet gant an ensteudoù. Un diell eus ajañs ar yec'hed a lâr ar c'hontrol e 2017. Splann ! 'n eus kavet anezhañ.

ESSURE : **DROUK MOUGET** **E KORF AR MERC'HED**

Kinniget e oant bet e-giz dazont an hilastalerezh (koñtrasepsion) peurbad. An ensteudoù Essure a oa bet lakaet da hogozik 200 000 maouez e Frañs etre 2002 ha 2017. An embregerezh amerikan Conceptus a oa bet o werzhañ anezho da gentañ. Da c'houde e oa bet adprenet en 2013 gant ar ramz alaman Bayer.

N'eus ket ezhomm lakaat an dud da gousket, na chom en ospital, an teknik-mañ a-benn dont da vezañ gaonac'h a oa an hini implijet ar muiañ e Frañs adalek 2009, hervez sifroù Renerezh hollek ar Yec'hed (Direction générale de la santé pe DGS). Mann nemet er bloavezh 2013 e oa bet lakaet 28 000 ensteudad gant ginekologourien ! En holl ec'h embann Bayer bezañ bet gwerzhet ur milion a ensteudoù dre ar bed, 240 000 e Frañs, al lec'h ma oa bet gwerzhet ar muiañ diouzh sellet ouzh an niver a annezidi1.

Met buan-tre e sav mouezhioù maouezed da ziskuilhañ efedoù-all. Skuizhder, bezañ breviet betek ma n'heller ket bale ken, poan benn, poanioù liesseurt, diwadennoù, kudennoù neurologel... Hir eo al listenn ha start ober al liamm gant Essure. Hiziv eo bet tennet o uterus pe korzennoù an uterus d'un 30 000 maouez bennak e Frañs, pa 'z eo an doare nemetañ da dennañ an ensteudad kuit. Da lâret eo 15 % ar re o doa dibabet an doare hilastaliañ peurbad-se. An darn vrasañ anezho 'z a gwelloc'h gant o yec'hed kerkent ha tennet koulz lâret.

Bayer a zibab tennañ an ensteud deus ar marc'had gall en 2017, ha deus ar Stadoù-Unanet en 2018. An embregerezh liesvroadel ac'h embann ez eo abalamour da « abegoù kenwerzhel » ha nac'hañ a ra kement si a vefe gant ar produ. Koulskoude ez eus dielloù, e-kerz savour an ensteud hag ar pennadurezhioù yec'hedel, pere en deus gallet kaout Splann ! a lak abeg war surentez an ensteudad...

1] Patricia Jolly, « Bayer cesse la commercialisation des implants contraceptifs Essure en Europe », Le Monde, 18 a viz Gwengolo 2017

PENNAD 1

BREIZHADEZED O VOUNTAÑ WAR AR PENNADUREZHIOÙ YEC'HEDEL

..... pajenn 4



Klañv, nammet, diskaret o buhez, gouzañverezed an ensteudoù (implants e galleg) Essure a gas o enklaskoù da benn evit kaout res-pontoù. E Breizh ez eo aet div vaouez betek hejañ ar pennadurezhioù yec'hed.

PENNAD 2

UN DEZREVELL TASMANT GANT AN ANSM A LAK DOUETAÑS WAR SURENTEZ AN ENSTEUD

..... pajenn 11




Un dezrevell kevarouezerezh bet gourc'hemennet 2017 gant Ajañs broadel ar yec'hed hag al louzeier (ANSM) a lakae war wel e oa sklaer d'ar poent-se dañjerusted an ensteud gaonac'hañ peurbad Essure lakaet en gwerzh gant Bayer. Met n'eo ket bet embannet biskoazh. *Splann !* a zo deuet a-benn da lakaat an dorn warni.

PENNAD 3

DIWALLEREZH A-DREUZ AR PENNADUREZHIOÙ YEC'HEDEL

..... pajenn 19



Istor degouezh war marc'had Europa ha Bro C'hall an ensteud Essure a zo azon ur sistem testeniekadur lez-ober, n'eo ket bet barrek an ANSM, pennadurezh yec'hedel gall, gant e sistem evezhierezh da dalañ ouzh-se.

BREIZHADEZED O VOUNTAÑ WAR AR PENNADUREZHIOÙ YEC'HEDEL

**Klañv, nammet, diskaret o buhez, gouzañverezed an ensteudoù (implants e galleg)
Essure a gas o enklaskoù da benn evit kaout respontoù. E Breizh ez eo aet div vaouez
betek heññ ar pennadurezhioù yec'hed.**



Guy Pichard

*Tapet fall eo yec'hed
Isabelle Ellis abaoe
eo bet lakaet ganti
ensteudoù histalerezh
peurbad Essure.*

› Kontet 'vez hec'h istor gant Isabelle Ellis abaoe eo bet lakaet dezhi an ensteudoù Essure. Memes istor ha kalzig a verc'hed o 'deus dibabet an hilasterezh peurbad-se.

› Asambles gant ur skiantourez eus Brest eo bet graet testoù en o-unan. Diskouezet eo bet e oa riskloù keñver metaloù an ensteudoù. Ha d'ar merc'hed da vountañ ouzh ar pennadurezhioù yec'hed.

› Dalc'het o deus krog kevredigezhioù merc'hed a-benn ma vefe lañset un enklask skiantel broadel war an ensteudoù Essure. Sañset eo da gregiñ e 2023, da lâret eo ouzhpenn 20 bloaz goude ma oa bet kroget da werzhañ anezhañ.

Isabelle Ellis zo 54 bloaz, emañ o chom e Sant Brieg. Klañvdiourez e oa, ha bremañ ez eo yac'hadourez evit ar vugale. Pa oa o klask un hilastalierzh da viken (koñtrasepsion) e oa bet lakaet un Essure da Isabelle d'an 21 a viz Eost 2008, daou ensteadad bihan meskaj metaloù silet e korzennoù an uterus.

Dindan un nebeut mizioù e krog Isabelle da gaout bec'h gant he skevent. A-greiz-holl ez a he yec'hed war fallaat : droug-skevent, diaezamantoù anaoudel, koll nerzh muioc'h muiañ a rae, betek kouezhañ, kaout poan kigennoù, pere a redi anezhi da vont gant ur gador-ruilh..

Sur eo Isabelle, « *Essure en deus kemeret 10 vloaz eus ma buhez diganin, euzus e oa. Santout a raen e oa erru ganin korf ur plac'h kozh gant kaout poan e pep lec'h ha n'hellen sevel na bale. Ma gwaz an hini a gase ac'hanon d'ar privezioù* », a gont deomp, eus he c'habined yac'hadourez e Langheu. Ur prantad gouzañv kriz a zo aet war washaat pa oa o kantren da gaout un deznaou mezegel.

Ur prantad gouzañv eus ar re gwashañ, ha gwas-hoc'h c'hoazh pa veze o kantren da gaout pare. Rak d'ar c'houlz ne gompren ket eus pelec'h e teu ar poanioù-se. En desped d'un hollad amprouennoù mezegel, ne oa bet kavet tamm displegadenn ebet. Ne oa ket diskredik da geñver an enstead d'ar poent-se « *Tamm-ha-tamm en em santen o vont. Oc'h en em lazhañ e oa ma c'horf ha kroget e oan da ober ar peadra betegoùt ne zihunfen ken an deiz war-lerc'h.* »

Ouzhpenn 30 000 maouez o 'deus lemet kuit Essure

Lakaet e oa diaes war gement tachenn eus he buhez ha dre zegouezh e kav Isabelle Ellis war ar genrouedad testeni maouezed-all gant ar memes ensteudoù Essure. Anavezout a ra aze ar pezh 'vez kontet gante. Goude bezañ graet enklaskoù eus he zu hag a-enep



Guy Pichard

Nathalie Beaucher 'neus bevet ur prantad hir ha poañus spontus a-raok komprenn eus pelec'h e teue.

da alioù mezeien 'zo e c'houlenn neuze ma vo tennet an enstead kuit en 2016.

Pa ne oa ket bet savet an enstead evit bezañ lemet kuit e tleer tennañ korzenn an uterus pe an uterus a-bezh zoken. Kazi diouzhtu e voe efed eme Isabelle. « *Tennañ a rae d'ur burzhud* », a gont-hi. « *Dindan un nebeut mizioù e c'hellen kerzhet en-dro, aet e oa ar boan diwar wel.* »

Goude prantad ar pareañ e teu hini ar stourm. Isabelle he deus lakaet da bal dezhi hec'h unan kas da benn ar stourm gant ar merc'hed-all. Dont 'ra da vezañ emskiant eo bras bras an afer : ouzhpenn 200 000 maouez e Frañs a vez gant an ensteudoù Essure ha n'eus bet den o lavarout dezho e vefe ur riskl bennak gant an ensteadad.

Lod, e-giz Isabelle, o deus bevet ur verzherinti. Sophie, 57 vloaz, o chom e kumun an Arvor (56) he deus gouzañvet poan benn spontus ha n'helle ket emvirout da droazhañ, ha se ac'h erruas adalek ma voe lakaet an enstead Essure dezhi. Alese e vo lakaet un neuro-frealzerezh a-benn reoliañ he c'hoant da stao-tat, ar pezh a washao he stad a-benn ar fin.

Pe c'hoazh Nathalie, 44 bloaz, o chom e Marcillé (35), gwelet he deus he c'horf o koshaat primoc'h primañ dindan un nebeut mizioù, gant poan-benn, gwadliñv kreñv ha skuizhder ingal da virout outi ober war dro bugale vihan.

Gouzañvet o doa feulsterioù benel war meur a live, lod 'zo en em rentet kont e oa erru o ensteud en uterus, pe c'hoazh toullet ar c'horzennoù anezhañ. Evit adkavout ur seblant buhez « normal » ez eus bet tennet o mammog da dost da 30 000 maouez betek-hen e Frañs¹.

Tennañ an ensteud n'eo ket fin ar verzherinti dre ret. Hep teknik tennañ ha keitaat da gentañ, ez eo bet spontus « an distruj », eme kevredigezhioù gouzañvadezed. Surjianed 'zo o defe aesaeet tennañ an ensteud o sachañ warnañ ha torret hennezh alese. Lod-all a operatae hep gwiriekat e pelec'h e oa erru an ensteudad.

Darn vrasañ ar maouezed o deus gwelet o yec'hed

o wellaat goude ma oa bet tennet an ensteudad. Met betek-hen n'eus enklaskerezh ebet a ziskouez al liamm etre an ensteudoù hag azonoù, ar pezh a vir outo da gaout al lezioù-barn ha goulenn justis. Kondamnet eo bet Bayer ur wech nemetken e Bro-Spagn². E Stadoù-Unanet 'neus kavet gwelloc'h an embregerezh paeañ miliadoù a dolar a-benn ma ne vefe ket eus ar proses kaset da benn gant 39 000 plac'h. E Bro Frañs 'neus klasket sevel ur c'hlemm hollek ar gevredigezh Resist. Kollet 'zo bet ganto e miz mae 2022³.

« Tchernobyl zo e-barzh ho kof »

Anat eo evit Isabelle ez eo ret lakaat al liamm-se war wel. Savet he deus he c'hevredigezh brezhon dezhi, Alerte Contraception, en 2018. Plac'h Sant Brieg a wel neuze e-pad meur a vloavezh penaos e vez laet, goustadik goustadik, mekanik ar Stad tal-ouzh-tal d'ar c'hemennoù diwall niverusoc'h niverusañ. Ur bodad heuliañ a oa bet savet en 2017 (Lennit « *Un dezrevell tasmant gant an ANSM a lak douetañs* » ha « *Diwallerzh a-dreuz ar pennadurezhioù yec'hedel* »), unan all en 2020, hag a-benn ar fin ez eo un enklask broadel a dlefe kregiñ a-raok fin ar bloaz 2022, da larêt eo 20 vloaz goude ma oa bet lakaet an ensteud war ar marc'had.

E-keit-se e tibab Isabelle hag he c'hevredigezh kenderc'hel gant klask pistriusded an ensteud, hag an efedoù a c'hellfe kaout ar metaloù pounner war korf ar maouezed. Ober a ra anaouedegezh Isabelle gant Sidonie Révillon, enklaskerez e Brest, geokimiourez, arbennik war an heuliañ izotopek (teknik a ro tro da



Guy Pichard

Ospital Brest.

1] Direksion hollek ar yec'hed, teuliad, « Comité de suivi des femmes porteuses du dispositif Essure », Ministerezh ar yec'hed, 25 a viz Genver 2022

2] Silvia Leon Danos, « Bayer condenada a indemnizar con 220.000 euros a una mujer por los daños del anticonceptivo Essure », Noticias jurídicas, 27.01.2022

3] Rentañ-kont lez-varn Pariz, 11 a viz Mae 2022



Guy Pichard

Sidonie Révillon, e Brest, a glask warlec'h drouk an ensteudoù.

dermeniñ orin an danveziou), enklaskerez stag d'al laborva Geo-ocean (Sko-veur Brest, CNRS, Ifremer) ha d'an IUEM (Institut Universitaire Européen de la Mer) ha hi e penn an embregerezh Sedisor ivez. Emañ o vont da ober an dielfennadennoù kentañ a-youll vat war hec'h intrudu dezhi hec'h unan, adalek 2018, adalek korzennoù ur vaouez a oa bet mat dezhi reiñ anezho d'un doare kuzhut. Ar pal : termeniñ « ADN » ar metaloù ac'h a da sevel an ensteud ha gouzout daout ha strewet int er c'horf.

An div vreizhadez a deu a-benn da ziskouez o am-prouennoù savet diwar danvez korfoù a-stok d'an ensteudoù Essure d'un toksikologour a lavar dezho kerkent : « *Tchernobyl zo e-barzh ho kof* », « *Klañv e oa ar maouezed-mañ* », a zispleg an enklaskerez. « *Goude ma oa bet tennet an ensteud e oa aet o stad war wellaat evito holl, kiriegezh an ensteudad n'hell ket bezañ sklaeroc'h* », emezi c'hoazh.

An disoc'hoù-se a a lak da zont war ar spered ez eus ul liamm etre strewadur ar metaloù e korf ar

merc'hed hag o azonoù (*symptômes e galleg*), kin-niget d'an ANSM (Ajañs broadel surentez al louzeier ha produioù ar yec'hed) evit ar wech kentañ e miz Genver, ha diwezhatoc'h e miz Here 2019. « *Ne oant ket en gortoz tamm ebet, an emvod kentañ a oa bet dre guzh koulz lâret... Deuet e oamp tre dre un nor en a-dreñv, hep roud ebet eus hon gweladenn er marilh...* », he deus soñj Isabelle. Gant Sidonie, e c'houlenno e vo lañset un enklask broadel o vont donoc'h el labour bet boulc'het ganto. Gonnezet o deus, mat eo d'ar vinstrezezh a lâr hiziv an deiz e 'oa un emgav boutin homañ.

Disemglev etre ministrerezh ar Yec'hed hag an ANSM

Met, un nebeut mizioù diwezhatoc'h, pa resev Isabelle ha Sidonie ar protokol bet savet gant ar ginekologour Lyon Gautier Chêne, fiziet ennañ gant Ministrerezh ar Yec'hed, ez int sabatuet. Ar vrestadez 'zo bet la-kaet a-gostez eus an enklask, ar studiadenn a lak ouzhpenn meur a c'hinekologour brudet evit bezañ a-du gant Essure (sellout ouzh « Ar c'hinekologourien etre daouarn Bayer ») pere a vez an dud tapet gant Essure o tec'hout kousto pe gousto. Menneg ebet koulz lâret eus ar metaloù pounner4. « *Bountet o deus ac'hanomp er-maez ar studiadenn penn-da-benn, a gont Sidonie. Betek ar c'hevredigezhioù gouzañvezerezed a zo bet lezet er-maez eus ar protokol.* » Aet e oa *Splann!* en darempred gant Gautier Chêne ha hennezh n'eus ket fellet dezhañ respont d'hon c'houlennoù.

Disoc'h : un enklask ne zere ket d'ar maouezed tizhet gant-se, rak padout a rafe 15 vloaz ! Keidenn an oadoù evit ar maouezed gant un ensteudad a vez peurliesañ dreist da 55 bloaz hirie an deiz, ar re wazh a c'hellfe

4) Gautier Chêne, « Étude multicentrique prospective de l'amélioration des symptômes après ablation de l'implant contraceptif Essure® - Etude ABLES », Hospices civils Lyon, 6 a viz Gouere 2021



Skiantourien an Ifremer,
e Brest, o sellet pizh ouzh
korzennoù Fallope degaset
gant Isabelle.

neuze kaout anaoudegezh o nammoù ez-ofisiel (ha kaout un digoll memes) pa vint ouzhpenn 70 vloaz ! « *Piv a c'hell krediñ ez eo a-benn 15 bloaz, pa deui er-maez disoc'hoù ar studiadenn-se, e talvezo ar boan c'hoazh ?* », eme prezidantez ar gevredigezh vreton gant fulor. « *N'eo ket a-benn 15 bloaz amañ e vo ret kinnig un dra bennak, bremañ an hini eo !* ». Erru fulor enne, ar c'hevredigezhioù Alerte Contraception ha Victimes DMI a gas ul lizher da vministrerezh ar Yec'hed, d'ar 15 a viz C'hwevrer 2022, alese e oa bet un emvod gante evit « *eskemm war ar poentoù disemglev* ». E-keit-se, a-drugarez da anaoudegezhioù e bed ar vedisinerezh e kas Isabell ivez ur gemennadenn brevez da gChristelle Ratignier ivez, renerez an ANSM, honnezh a ginnig dezhi un emvod kuzhut, en eil gant eben. Stadañ 'ra Isabelle e anavez nebeut ar renerez war an doser, met kadarnaat a ra eo aet a-du gant he ali o lavaret n'eo ket kempoell ar studiadenn kinniget gant ar vistrerezh. N'he 'deus ket respontet da Splann ! Christelle Ratignier. E Pariz, d'an 20 a viz Mae 2022, pa oa Sidonie hag Isabelle war-nes kinnig o arguzennoù dirak dileuridigezh ar vistrerezh e tegouezh Christelle

Ratignier en emvod a gont Isabell deomp. « *Sklaer e ooa n'he doa ket prevenet e teufe emezi. Souezus-tre e oa, ken o doa bet ezhomm 10 munutenn distan ar berzhidi a-raok kregiñ gant an emvod da c'houde.* » Prezidantez Alerte Contraception a grog gant ober an dro d'an daol a-benn gwelet pegen desket e oant war an danvez, « *ha ne anavezent ket kalz traoù...* », emezi dipitet.

Sidonie a ginnig un astenn d'an enklask metaloù pounner, diazezet war disoc'hoù kentañ bet diwar he dielfennadennoù. « *Hep kemer lec'h ar studiadennoù klinikel nebeut* », an enklaskerezh a soñj dezhi eo holl bouezus an enklaskoù war ar metaloù evit dont a-benn da

adkavout ar c'hudennoù liammet gant an ensteud. « *Christelle Ratignier a oa bet entanet kerkent gant ar raktres, biologourez eo hi ivez !* », eme Isabelle. « *Goulennet he doa e vefe daleet an enklask broadel kuit da arc'hantaouiñ un dra ha tremen hebiou ar pep retañ. An dud-all a oa o kemer perzh en emvod ne felle ket dezho kement, met rediet int bet da asantiñ.* »

Studiadenn Sidonie Révillon, diouzh he zu a dlee bezañ kaset da benn er mizioù da zont, gant un astenn

**HA D'UN
TOKSIKOLOGOUR A
LAVAR DEZHO
KERKENT :
« TCHERNOBYL ZO
E-BARZH HO KOF »**

d'an enklask broadel cheñchet e hent dezhañ. An ANSM en deus ansavet aotren ur yalc'had evit se, ur wech kadarnaet ar protokol kinniget gant ar vrestad dez hag ur skipailh enklaskerien⁵. « *N'on ken nemet un dreuzell en enklask* », eme Sidonie Révillon, « *anavezout 'ran an ostilhoù, an hentenoù, met ret eo bodañ ur skipailh tro-dro ar c'hudennadurioù-se leviet gant arbennigourien war yec'hed an dud, ar pezh am boa spi da gavout en ur genlabourat gant tud Lyon* ».

P'emaomp o skrivañ ar pennad-mañ, eo bet desket ganeomp e 'vo kroget an enklask broadel e penn-kentañ 2023, hervez an DGS. Hag evit poen n'he deus ket roet aotre ar vistrerezh da ginnigoù enklaskerezh Brest. An div vretonez a chom gwall aketus : ne lezint ket an traoù da dremen e-giz-se.

Juliette Cabaço Roger, Faustine Sternberg, Guy Pichard

5] Postel eus Anne Moulin, denn e-karg eus politikerezh produioù ar yec'hed, direksin hollek ar yec'hed (DGS), miz Mae 2022.

« Kemeret e vezont evit merc'hed **histerek** »

Kantreadenn hir gouzañvadezed Essure he deus da bennabeg ne vez ket selaouet a-walc'h gant ar c'hinekologiezh gall, a zo chomet bouzar d'o gloazioù.

En desped d'an efedoù a-eil niverus, nammus evit lod anezho a-wechoù, e teus talet gouzañvadezed Essure ouzh diseblant, pe c'hoazh dispriz, eus perzh ar c'hinekologourien.

E-giz Sophie Meledo eus Penn-Ar-Bed. Goude 10 bloaz gouzañv he deus graet al liamm gant an ensteudoù Essure en 2020, met « *ne vez ket sellet ouzh se d'un doare sirius* » gant he c'hinekologourez. « *Lâret he deus din : « forzh penaos, penaos e c'hellit prouiñ ez eo liammet ar c'hudennoù deskrivet din ganeoc'h gant an ensteadad Essure ? M'ho peus c'hoant e tennfen anezho deoc'h e rin, met un operatadenn koñfort an hini eo* ». »

Un diouer a eskemmoù a vez diskuilhet muioc'h mui gant ar c'hevredigezhioù, evel ma oa bet gwelet gant an tabut tro-dro d'ar feulstrerioù ginekologel¹. N'eo ket souezhus eta e vez niverus ar maouezed o tisplegañ n'o deus ket bet da zibab o doare hilastaliañ peurbad. « Dleet o defe ar merc'hed gallout ober un dibab, kaout ur gwir diviz etre ar mezeg hag ar prederiad. An dro-spered dreist-mougus-se 'zo da labourat warni », a ziefenn an doktor Sylvain Bouquet.

An efed placebo

Ginekologourien 'zo a ra al liamm etre orin ar poanioù hag ehan ar bilulenn : o foanioù benevel a vefe liammet gant koshadur an uterus (adenomioz pe

endometrioz e diabarzh an uterus), kavet ingal gant merc'hed ouzhpenn 40 vloaz. « En em adkavout a reont gant azonoù a glot gant ar pezh a vez gant an holl. E penn un toullad maouezed eo erruet ar soñj eo liammet gant an ensteud Essure », eme ar c'helenner Hervé Fernandez, ginekologour hag ezel eus ar bodad Essur e Skolaj ar c'hinekologourien-amiegeour e Frañs (CNGOF).


An azonoù, mizioù poanuis, ne zisplegont ket koulskoude an hollad efedoù a-eil a gont gouzañvadezed an ensteudoù. Ul lodenn eus an dud a-vicher a gendalc'h da zifenn an ensteudoù Essure memestra. Ha kaout douetañs en testeni an dud wazh, e-giz an doktor Lopes a gav dezhañ eo bet levezonet un toullad bras ar c'hlañvouezed gant ar « c'hazetennoù ». Ha santet o defe ur wellaenn goude ma oa bet tennet an ensteadad evit « doareoù bred-ermalc'h anat : pa vez ur vaouez o lakaat azonoù disheñvel war goust ur sistem bennak, ma tennit dezhi ar sistem, e c'hellit kaout ar pezh 'vez graet diontañ an efed placebo, da lâret eo en deus bet e beadra ar bred hag e c'hell neuze mont an azon diwar wel. »

Maouezed prest da c'houzañv un histerektomiezh (dilemel an uterus) evit poanioù a-eil a-benn ar fin, pe breidel memes ? « Un dispriz boutin a-walc'h a-benn ar fin », ac'h anzav ar c'hinekologourez Thelma Linet, bet o labourat en Naoned e-pad pell : « Kustum 'vezer n'eus forzh penaos : ar maouezed 'zo foll, en o fenn emañ-se, n'eus ket eus se. Un dra klasel eo e bed ar gineko, kemeret e vezont evit merc'hed histerek da gentañ tout. ». Peadra da lakaat degadoù a viliadoù a c'houzañvadezed o deus dleet gouzañv seurt operatadenn da fuloriñ.

1] Caroline Coq-Chodorge, « Gynécologues accusés de viols : le dialogue est rompu entre médecins et patientes », Mediapart, 29 a viz Even 2022

UN DEZREVELL TASMANT GANT AN ANSM A LAK DOUETAÑS WAR SURENTEZ AN ENSTEUD

Un dezrevell kevarouezerezh bet gourc'hemennet 2017 gant Ajañs broadel ar yec'hed hag al louzeier (ANSM) a lakae war wel e oa sklaer d'ar poent-se dañjerusted an ensteud gaonac'hañ peurbad Essure lakaet en gwerzh gant Bayer. Met n'eo ket bet embannet biskoazh. Splann ! a zo deuet a-benn da lakaat an dorn warni.



*Amañ e vezont
gwelet an ensteudoù
dre mekanik
Minapath.*

› Un dezrevell skrivet gant un den eus Skol ar Mines e 2017 a lakae war wel dañjerusted an ensteud Essure. Eno e c'hellfed lenn e vefe tu displegañ perak 'vez klañv ar merc'hed.

› Bet eo bet gourc'hemennet an dezrevell-se gant Ajañs broadel ar yec'hed hag al louzeier (ANSM) pehini 'neus ket embannet anezhañ. Ganeomp 'vez diskoachet an dokumant.

› Tomm-tre eo bet ar ginekologourien e Bro Frañs ouzh an ensteudoù Essure. Medisined 'zo 'deus bet kalzig a arc'hant digant Bayer. Peadra d'en em c'houlenn diwar-benn an doare ma vez graet ho labour ganto.

Evit talañ ouzh ar c'hemenoù diwall ingaloc'h ingalañ¹ (239 en 2015, da lâret eo 100 muioc'h evit ar bloaz a-raok), an ANSM (Ajañs Broadel ar Yec'hed hag al Louzeier pe Agence nationale de la santé et du médicament) en deus lakaet an dafariad gaonac'hañ peurbad Essure dindan evezhierezh kreñvaet en 2015². Daou vloaz goude eo embannet gant trouz krouidigezh un Bodad heuliañ skiantel berrbad (pe Comité de suivi scientifique temporaire- CSST) en karg da studiañ ar c'hempouez gounidoù / riskloù evit an ensteud.

Met er memes koulz, e miz C'hwevrer 2017, en diavaez ar bodad ha hep na ouefe ar mediaoù, ez eo fiziet en un arbennigour eus Skol ar Minoù (École des Mines) gant an ANSM ur resped a-benn studiañ ur arventenn resis : riskl daskrignadur (corrosion e galleg) an ensteud. E zezrevell – bet rentet e miz Ebrel ar bloaz-se – ne lez plas ebet d'an douetañs : « *Kendeuziñ an danvezioù a zo ur skouer anat daskrignadur galvanek* » a gas « produoù daskrign » da ober « *reaktadennoù tanijenn disheñvel rak ar produioù -mañ* »³. Peadra da zisplegañ hervezañ, an efedoù a-eil liesseurt a arseller gant ar maouezed, evel ar boan benn pemdeziek, kudennoù skevent, troazhañ, pe koll fiñv gant lodennoù'zo o c'horf. Disoc'hoù ar studiadenn-mañ n'int ket bet

embannet d'an holl gwech ebet c'hoazh. An dezrevell a seblant bezañ bet diverket eus an dielloù : un doser war an tem a gaver war lec'hienn an ANSM, pehini a stroll an holl studiadennoù bet kaset da benn diwar-benn an ensteudoù ha deiziadoù a-bouez ivez. Met ar studiadenn arbennik-se n'eo ket menneget neblec'h. Betek an divizoù ofisiel o reiñ resped dezhañ n'heller ket kavout.

Splann ! a zo deuet a-benn da adlakaat an dorn warni a-drugarez da Sabine Hahner eus kevredigezh Victimes DMI. Setu kavet un den tost d'an doser, a oa mat dezhañ testenianñ gant ma ne vo ket embannet e anv.

« *N'hon eus ket klasket kuzhat tra ebet* », a respont Thierry Thomas e karg eus an ensteudoù en ANSM.

War c'hinnig ar Bodad heuliañ skiantel⁴ 'oa bet skrivet ur frazenn en ur lâr e 'oa eus ur riskl daskrignadur galvanek. Met morse n'eo ket bet lâret d'ar merc'hed a 'oa eno e vefe dañjerus evit o yec'hed an diskrignadur-mañ.

« **O ensteud a zo louzou razhed** »

« *Rik e-giz ur bilenn er c'horf!* », a zispleg deomp an den-mamenn. An dezrevell kuzhut-mañ a ziskouez e kas kenstok tri danvez a gaver en ensteud Essure ar pezh a anver daskrignadur galvanek. « *Evit bezañ sklaer ez eo ur pol “+” hag ur*

« **KENDEUZIÑ AN DANVEZIOÙ A ZO UR SKOUER ANAT DASKRIGNADUR GALVANEK** »

1] Ajañs broadel surentez al louzeier ha produioù ar yec'hed (ANSM), dokumant « Essure : bilan des signalements de matériovigilance reçus à l'ANSM entre 01/01/2013 et 31/07/2022 », miz Eost 2022

2] Ajañs broadel surentez al louzeier ha produioù ar yec'hed (ANSM), dokumant « Essure : bilan des signalements de matériovigilance reçus à l'ANSM entre 01/01/2013 et 31/07/2022 », miz Eost 2022

3] Teuliad « Expertise de données de corrosivité pour dossier », 7 a viz Ebrel 2017

4] Bodad heuliañ skiantel berrbad eus Ajañs broadel surentez al louzeier ha produioù ar yec'hed (ANSM), « Dispositif médical Essure, synthèse des données disponibles à l'ANSM. Évaluation du rapport bénéfice/risque du dispositif médical Essure », ANSM, 19 a viz Ebrel 2017

Savadur an ANSM
e Pariz.



Yann Le Ny

pol "-". N'hell degas mann nemet daskrignadur, ar pezh a vez diazez d'ar reaktadenn allergiezh a c'helled arsellet gant ar c'hlañvourezed. »

Peadra da zisplegañ tout an azonoù, ken liesseurt-all ?⁵ « *Respont pep hini a vo disheñvel mat, a zispleg deomp. Met bepred en deus bet an holl anezho produioù pistrius er gwad. Pa ne vefe nemet nikel, houarn, krom, titan... Gant kementadoù a-us ar re boas er c'horf.* »

Disoc'hoù ar brizadur-se a zo bet kadarnaet diwezhatoc'h gant studiadenn enklaskerien amerikan embannet d'an 12 a viz Mae 2022 er gelaouenn skiantel etrebroadel Acta Biomaterialia⁶. Hag ivez gant ur studiadenn all graet gant ur skipailh skiantourien gall e miz gouere 2020 embannet war European Journal of Obstetrics & Gynecology and Reproductive

Biology⁷.

Koulskoude n'eus ket bet graet mann gant an ANSM en 2017 daoust ma oa en e-gerz ur c'hemenn diwall hollbouezus.

Gant Bayer eo bet lâret deomp e ouient⁸ e vefe deus an dokumant-se. Met lâr a ra n'eo ket ken sklaer e vefe eus un daskrignadur galvanek bepred e korf ar merc'hed. Ouzhpennet 'zo bet ganto e 'oa bet kemeret e kont forzh penaos ar riskl-se 'ba studioù bet graet a-raok ma vefe gwerzet an ensteudoù.

Un nebeut mizioù diwezhatoc'h, abalamour d'an diouer a zisklêriañ gwallzarvoudoù liammet da Essure, eo bet ehanet ar siell CE gant Aozadur priziañ Iwerzhon – ar pezh a ro an aotre da vezañ lakaet en gwerzh (lennit « Diwallerezh a-dreuz ar pennadurezhioù yec'hedel ») – an

5] Utkarsh Chauhan, Brett Cassidy, Jan Willem, Cohen Tervaert, « Asia (Shoenfeld's syndrome) due to hysteroscopic Essure sterilization », Autoimmunity reviews, miz Kerzu 2021

6] Can Asla, Jeremy L Gilbert, « In Vitro Corrosion Assessment of the Essure® Medical Device in Saline, Simulated Inflammatory Solution and Neutral Buffered Formalin », Asla Biomaterialia, miz Gouere 2022

7] François Parant, Muriel Bost, Erdogan Nohuz, Stéphanie Moret, Julien Maurin, Gautier Chene, « Potential release of toxic metal elements from Essure® device in symptomatic patients: First results of the French Ablimco cohort » European Journal of Obstetrics & Gynecology and Reproductive Biology , miz Gouere 2020

8] Galv dont en-dro Essure, postel eus Bayer, 19 a viz Eost 2017

amzer d'an embregerezh liesbroadel Bayer da reiñ un niver bras a zielloù evit ar pezh a sell ar gwallzarvoudoù liammet gant an ensteud. Hep ar re-se e oa bet kollet da vat ar siell goude ar prantad ehaniñ.

Met kemer lañs a raio Bayer o tennañ e brodu eus ar marc'had e-unan « *evit abegoù kenwerzh* » eme. E lizher galv distreiñ ar produ ez eo resisaet « *ne gav ket d'an ANSM e lak abeg an dibab tennañ ar siell CE e-pad tri miz gant an Aozadur prziañ d'an ampoent war alioù ar bodad arbennigourien evit ober war-dro ar maouezed gant ensteudoù Essure* ». Ret kompren neuze ne lakaer ken ar produ en abeg... Peadra da lakaat an den o reiñ titour deomp da fuloriñ : « *Bayer a gendalc'h da lavaret n'eus ket si ebet gant ar produ, gaou eo ! O ensteud a zo louzoù razhed.* » N'o 'deus ket bet c'hoant tud Bayer lakaat ar gaoz war ar frazenn-se.

Hervez Thierry Thomas, n'eus ket graet netra an Ajañs e-keñver an dokumant « kuzhet » abalamour m'eo bet tennet an ensteudoù eus ar marc'had. « *Met n'omp ket bet plijet e vefe lâret gant Bayer e 'oa bet tennet evit abegoù ekonomikel. Evidon-me n'en doa ket Bayer pep tra evit ma chomfe an ensteud er marc'had a-fet surentez. Bet o bet un doare da harzhañ an doser...* »

Ur c'hempouez gounidoù / riskloù a-veskell

Ne oa ket div sizhun goude ma oa bet roet an dezrevell o kadarnaat daskrign an ensteudoù, ma oa ar Bodad heuliañ skiantel berrbad savet

gant an ANSM o reiñ e glozadurioù ivez : n'eus ket abeg gant ar c'hempouez gounidoù / riskoù⁹. Un disoc'h adkemeret dizehan er mediaoù a gas diskompren ar gouzañvadezed.

Penaos e c'hell ar bodad heuliañ sevel ur c'hlozadur ken disheñvel eus an dezrevell tasmant (pa ne gaver ket roud anezhañ) ? Ret eo sellet ouzh tu ar protokol en deus hentet e labour da gentañ penn. An enklaskerien a dle keñveriañ an ensteud Essure gant argoulm ar c'horzennoù, operatadenn en dez ezhomm un ahunadur hollek en un operataat, ar pezh a gas diouzhtu un toullad riskloù. « *N'eus ket bet keñveriet gant dafar hilastaliañ-all gwech ebet, padal e oa ret keñveriañ ar pezh a c'helled keñveriañ* », eme


Thierry Rabilloud, biologour ezel eus ar bodad, en ur vennegiñ da skouer al linkell (stéritek e galleg).

Ret eo notenniñ eo bet an ahel pennañ evit ar bodad heuliañ ne oa ket ezhomm ahunadur hollek evit lakaat an Essure. Koulskoude eo gwall zisheñvel ar wirionez : a-benn ar fin e vez dav, ur wech diwar div, ober un ahunadur hollek. Ur studiadenn gant an ANSM bet graet en 2017 war 71 303 maouez gant un ensteudad a ziskouez o deus bet un ahunadur hollek 73 % anezho¹⁰.

Ur veskell kentañ hervez an enklasker a ro un eil alc'hwez deomp da gompren an doser. « *Aon an ANSM a zo ez afe tout ar maouezed gant un ensteudad da c'houlenn e vo tennet anezhañ – gant ar riskloù liammet d'an ahunadur ha gant an operatadenn –, ma vez embannet ez eus ur riskl gant an ensteud, emezañ. An termoù « riskl » a*

9] Rentañ kont bodad heuliañ skiantel berrbad eus an ANSM diwar-benn Essure, 20 a viz Ebrel 2017

10] Ajañs broadel surentez al louzeier ha produioù ar yec'hed (ANSM), teuliad « Surveillance de l'implant de stérilisation définitive Essure », lec'hienn internet an ANSM, 19 a viz Eost 2022



Ar skeudenn-mañ zo 'barzh un dokumant bet graet gant Vincent Balter, skiantour e ENS Lyon.

oa bet implijet [en dezrevell, NDLR] a vez ordin dindan an termenadur roet er medisinerzh. Ar c'heleier ne oant ket ken sklaer hag ar pezh en defe gallet bezañ, daoust d'ar sifroù gwir bezañ aze, n'eus ket bet kuzhet netra. »

D'ar c'hevredigezhioù gouzañvadezed n'eus bet kinniget mann nemet bilañs ar bodad heuliañ, pehini a skriv riskloù bihanoc'h gant an ensteudad eget ar pezh 'vez stadet. N'eus ket bet menneg ebet eus ar prizadur o kemenn diwall d'an daskrignadur ingal ha d'an dilaoskañ metaloù er c'horf¹¹.

An dilaoskañ staen anavezet abaoe 2004

Bepred ez eus elfennoù en doser o defe dleet strafuilhañ ar pennadurezhioù gall pell a-raok

ar c'hevaouezerezh-mañ (expertise e galleg) en 2017. Adalek ma oa bet lakaet an ensteud war ar marc'had e oa studiadenoù disheñvel, graet gant Conceptus – embregerezh amerikan en deus krouet an ensteud – ha Bayer da c'houde, a oa bet roet d'ar pennadurezhioù. Unan anezho, eus ar bloavezh 2004, a ziskoueze dija ur c'hementad dilaoskañ staen (ur metal a gaver en ensteud). Sifroù n'o deus ket sachet evezh ajañs al louzeier, nag en Bro-C'hall nag er Stadoù-Unanet, e-giz ma oa bet embannet gant Le Monde en 2020¹².


Sp!ann ! a zo deuet a-benn da sellet ouzh an diell kuzhut diabarzh da gConceptus. Ar studiadenn a gloz n'emañ ar c'hementad staen dilaosket e korf ar maouezed a-us d'ar c'hementad « reizh » lonket bemdez¹³. Sifroù a vez lakaet en abeg

11] Ajañs broadel surentez al louzeier ha produioù ar yec'hed (ANSM), teuliad « Surveillance de l'implant de stérilisation définitive Essure », lec'hienn internet an ANSM, 19 a viz Eost 2022

12] Stéphane Foucart, « Implants contraceptifs Essure : les soudures à l'étain mises en cause » pennad eus Le Monde, 22 a viz Kerzu 2020

13] Conceptus, « Corrosion susceptibility on Conceptus Essure micro-insert : 6 month report », rentañ-kont Conceptus, 2004

gant enklaskerien Minapath¹⁴ e-touez reoù-all. « *Ha dreist-holl, n'heller ket keñveriañ ar pezh n'eus ket da geñveriañ* », a lavar gant estlamm Michel Vincent, prezidant arnodva Lyon pehini



Juliette Cabaço Roger

Michel Vincent eus arnodva Lyon Minapath.

en doa diskouezet eo juntr an ensteud a zilaosk kementadoù bras staen. « *Ar studiadennoù rak-klinikel a ra dave d'ur c'hementad staen lonket, padal e vez kaoz amañ eus un ensteud gant metal a-stok war-eeun gant ar c'hig, o vo strewet er c'horf a-bezh.* »

Gant tout an elfennoù-mañ e oa ar c'hlemmoù o verniañ el lezioù-barn. En 2020 en deus roet Bayer 1,6 miliard a zollaroù da glozañ 39 000 klemm a-zivout Essure¹⁵. E danevell oberiantizoù 2018 an embregerezh, emañ an ensteud Essure e-touez dispignoù brasañ ar budjed justis gant ar stal bras louzeier hag agrokimiezh alaman (ouzhpenn eget daougementiñ en deus graet hemañ etre 2017 ha 2018) e-kichen darbarioù mezegeal-all, louzeier ... hag ar Roundup¹⁶.

**Juliette Cabaço Roger
et Faustine Sternberg**

14] « Rapport d'expertise sur 5 documents fournis par la société Bayer, fournis par la société d'avocats Lyris et financée par l'association de victimes DMI », rentañ-kont Minapath, 5 a viz C'hwevrer 2021

15] Kazetennerien Les Échos, « Contraception : Bayer met 1,6 milliard de dollars sur la table pour régler l'essentiel des plaintes américaines », pennad Les Échos, 20 a viz Eost 2020

16] Rentañ-kont ekonomikel Bayer eus 2018

Ar c'hinekologourien etre daouarn Bayer

An ensteudoù Essure a zo bet ambrouget gant ul lodenn eus ar c'hinekologourien, ha lod a vag liammoù interest kreñv gant Bayer, ramz an apotikerezh.

N'heller ket komz ouzh an ensteudoù Essure hep mennegiñ an liammoù dre interest a gaver er metoù mezegel hag en industriezh al louzeier. Honnezh en deus postet sammadoù bras bras evit ober bruderezh d'ar produoù graet gante, gant ar pal da gentañ penn levezoniñ ar vezeien.

E Bro C'hall e oa bet roet 176 million a euroioù d'ar vedesined gant Bayer HealthCare SA etre 2012 ha 2021, hervez al lec'hiennoù Transparence Santé hag Euro for docs. Kendalc'hioù, stummadurioù, enklaskoù, digoll evit ar frejoù, alioù arbennik... An holl roadennoù-se a zo deuet da vezañ foran a-drugarez d'al lezenn Bertrand, votet goude trouz yec'hedel ar Médiateur en 2011, pehini en doa lakaet war wel ar stourmoù interestoù-se.

A-drugarez d'al lezenn-se , e c'heller gouzout

bremañ en deus roet Bayer 35.931 € da Olivier Graesslin, prezidant ar bodad Essure er CNGOF (Skolaj Broadel Ginekologourien Frañs pe Collège national des gynécologues de France), etre 2014 ha 2019. Pennospital skol-veur (CHU) Reims, e lec'h m'emañ hennezh e penn ar servij ginekologouriezh, en deus bet 66.746 € etre 2014 he 2020. Ma seller a dostoc'h, e vo gwelet en deus bet Pierre Panel, Penn servij e pennospital skol-veur (CHU) Versailles, bet bez-prezidant ar CNGOF ha kuzulier a-youl vat evit Conceptus – embregerezh en deus ijinet Essure, 15.724 € digant Bayer etre 2014 ha 2017.

Ar mezeg Hervé Fernandez, penn servij ginekologouriezh-amiegouriezh en ospital Bicêtre, ezel eus strollad labour Essure ar CNGOF, en doa bet 42.020 € etre 2014 ha 2019. An tri anezho, e-touez reoù-all, o deus graet bruderezh d'an ensteudoù Essure gant nerzh. Hiziv an deiz e vez goulennet o ali diganto ingal c'hoazh e-giz arbennigourien war ar sujed gant ar Stad, er bodadoù heuliañ kenkoulz hag en enklask broael da zont (sellout ouzh al lodenn « *Breizhadezed*

.../...

o vountañ war ar pennadurezhioù yec'hedel »). Evit ar c'hvedredigezhioù gouzañvadezed, eo ar c'hontrol, deskrivet int bet e-giz surjianed da dec'hout.»

An dud a-vicher e sektor ar yec'hed a vez, peurliesañ, nebeut emskiant eus al levezon en devez ar sammadoù arc'hant-se war o doare da labourat, evel ma tislep Aozadur Bedel ar Yec'hed (ABY pe OMS, Organisation Mondiale de la santé) er pennad : Kompren brudañ al louzeier ha respont dezhañ¹ : « *An embregerezhioù o studiañ ar marc'hadoù o deus jedet e veze ar gounid dre geidenn, gant gwerzhioù ouzhpenn er bloavezh 2004, evit un dollar postet da vrudañ al louzeier e-tro 8,34 \$ (...).* »

« Me a soñj din gallout ober ma soñj din-me ha kempouezañ, eme Olivier Graesslin d'en em zifenn. Darn vrasañ an arbennigourien o devez liammoù interest gant an industriezh. N'eo ket evit se e vezer dindan kazelgê industriezh al louzeier, mirout a reer ar varregezh da varnañ.

Ar pezh a ran er bodad Essure a zo dizalc'h penn-da-benn. »

Ar c'helenner Fernandez a lavar eus e du : « *Ar pep retañ evidomp-ni, surjianed, a zo ne vefemp ket dalc'het penn-da-benn gant ul labordi evit implij un teknik bennak. N'omp ket amañ evit difenn pe bezañ gwerzherien al labordi-mañ labordi met evit diorren an teknikoù a simpl eo tretamantoù an dud. Ar pal nemetañ, an dra nemeti a zo pouezus deomp.* » Pierre Panel, diouzh e du, n'eus ket bet c'hoant da respont d'hon goulennoù.

Padal, en ur zifenn an ensteudoù-se eo aet an dud brudet-mat e bed ar c'hinekologourien e Bro-C'hall, anavezet evit o labour gant o c'henseurterd, da gemer perzh en ur « *plan marketing efedus-tre* », eme an ABY c'hoazh². Hep o emouestl n'o defe ket gallet embregerezhioù e-giz Conceptus ha Bayer lakaat Bro-C'hall da vezañ an eil war marc'had bedel pozañ an ensteudoù Essure.


1] « Comprendre la promotion pharmaceutique et y répondre », levr hollek eus Bodadeg bedel evit ar yec'hed, 2009, troet e 2013

2] « Comprendre la promotion pharmaceutique et y répondre », levr hollek eus Bodadeg bedel evit ar yec'hed, 2009, troet e 2013

PENNAD 3

DIWALLEREZH A-DREUZ AR PENNADUREZHIOÙ YEC'HEDEL

Istor degouezh war marc'had Europa ha Bro C'hall an ensteud Essure a zo azon ur sistem testeniekadur lez-ober, n'eo ket bet barrek an ANSM, pennadurezh yec'hedel gall, gant e sistem evezhierezh da dalañ ouzh-se.



*Amañ e vezont
gwelet an
ensteudoù
dre mekanik
Minapath.*

- › N'eus ket a-walc'h a surentez gant an ensteudoù 'vez gwerzhet e Europa rak n'eo ket strizh a-walc'h al lezenn.
- › Gant Conceptus ha Bayer - an daou embregerezh o 'deus gwerzet Essure - 'zo bet kuzhet ur bern gwall efedoù lakaet war wel gant ar merc'hed hag ar vedisined.
- › E Bro-C'hall eo tort an doare surentez tro-dro d'al louzeier. Ne vez ket dastumet a-walc'h ar gwall efedoù 'vez gant an dud hag ar glañvourien.


Evit bezañ gwerzhet en Unvaniezh Europa e tle an dafar mezegel tapout ar siell CE digant aozadurioù testeniekaat prevez. Ar re-se a vez paeet gant obererien ur produ bennak evit reiñ al label priziuz « *hep sellet a re dost* » a zispleg ar gazetenn *Le Monde* en un enklask gant konsortiom etrebroadel ar c’hazetennerzh bet embannet e 2018¹.

Un testeniekadur lez-ober muioc’h c’hoazh pa eo diazezet war ar studiadennoù roet gant ar saverien o-unan. « *Stern ar siell CE e-unan a lez un atebegzh vras – hag ur galloud da zibab diouzh ar soñj bras ivez a-wechoù – d’ar saver war meur a live* », eme ar c’hannaded Julien Borowczyk (LREM) ha Pierre Dharréville (Nupes) en o dezrevell kelaouiñ parlamantel rentet e miz Meurzh 2019².

Komz a reont eus o zu eus « *freuz-stal klok ar sistem evezhiañ yec’hedel aotren lakaat war ar marc’had* ». Mankoù o deus tennet splot oute an embregerezhioù Conceptus ha Bayer goude, a-benn lakaat en gwerzh an ensteud hilastaliañ peurbad Essure.

« Essure ne dapfe ket ar siell hirie an deiz »

Un arbennigour gall war an darbaroù mezegel – en deus bet c’hoant da chom dianav deomp -, a lavar deomp eo gwall souezhet en defe bet al label CE an ensteud-se, goude lenn an dielloù diabarzh niverus, deuet da vezañ foran³ pa oa prosezioù en Kalifornia



An tamm paper roet d’ar merc’hed pa vefe lakaet an ensteudoù Essure.

en 2020 (douget klemm 27 000 gwech er stad amerikan-mañ diwar an 39 000 gwech e oa bet douget klemm gant maouezed⁴ gant un ensteudad er Stadoù-Unanet).

Ur juntr implijet da ober an ensteud, en deus hervezañ, ur riskl da derriñ pe da fallaat. « *Ar juntrouù a vez dindan gwaskoù mekanek ingal gant fiñvoù munut ur wech ensteuded* », a zispleg-eñ. Elfenn-all o souezhañ hon arbennigour : ar fed n’hell ket an ensteud bezañ dilemet. Ur poent a oa bet lakaet war wel gant ar bPennadurezh Uhel Yec’hed pe Haute autorité de santé⁵ (HAS), he doa rak-kiniget ne vefe implijet an ensteud mann nemet pa n’eus doare-all ebet ken d’ober a-hend-all.

Gallout a reomp notenniñ ivez diwar dielloù ar

1] Antoine Schirer, Mouna El Mokhtari, « Implant Files » : comprendre le scandale de la surveillance des dispositifs médicaux, article du journal *Le Monde*, 26 novembre 2018

2] Julien Borowczyk, Pierre Dharréville, rapport d’information parlementaire, commission des affaires sociales, mars 2019

3] Stevie Glaberson, « Hundreds of Previously-Hidden Documents Now Available About Harmful Permanent Birth Control Device Essure », pennad embannet war lec’hien internet an ONG eus Stadoù Unanet Public Justice, 9 a viz Gouere 2020

4] Stevie Glaberson, « Hundreds of Previously-Hidden Documents Now Available About Harmful Permanent Birth Control Device Essure », pennad embannet war lec’hien internet an ONG eus Stadoù U

5] Ali Bodad priziañ ar produioù hag oberioù, « Essure, dispositif pour stérilisation tubaire par voie hystérocopique », Haute autorité de santé (HAS), 31 a viz Here 2017

justic amerikan en deus cheñchet al lec'h fardañ meur a wech. En dielloù bet diguzhutaet e an zav an embregerezh Conceptus n'helle ket kretaat e oa ar re o labourat evitañ o toujañ ouzh an normoù⁶. Evit hon arbennigour ez eo simpl, « *diglok eo an doser evit live ar riskloù, Essure n'en dije ket gallet tapout ar siell CE hirie an deiz* ».

Ar c'houlennoù-se 'zo bet savet ganeomp da vBayer. An embregerezh 'neus lâret deomp 'oa « *souezhet e vefe eus un den dianavezet o reiñ e soñj war an doser-mañ* ». Ha dezho da reiñ ivez skwer an ensteudoù 'vez lakaet e kalon an dud a 'zo tamm pe damm memes metaloù ha Essure, « *ha 'neus kudenn ebet* ». Savet hon eus goulennoù ivez da TÜV Sud, 'neus roet ar siell CE da Essure e 2002. E keñver surentez an ensteudoù eo bet lâret « *roet hon eus ar siell dezho, neuze repont d'ho koulenn zo anat* ».

Respont ebet gant an NSAI (National Standards Authority of Ireland) 'neus roet ar siell e 2013.

Efedoù a-eil kuzhet gant an oberer

Desket 'vez ivez en dielloù justis-se bet roet publik n'eo bet treuzkaset nemet un dregantad izel mat eus ar c'hlemmarc'hioù ha klemmoù eus perzh klañvourezed ha mezeien gant Conceptus ha Bayer da heul. Er Stadoù-Unanet ez eo ouzhpenn 32 000 klemmarc'h ha klemm n'int ket bet dezrevellet d'ar bennadurezh yec'hedel amerikan⁷, an FDA (Food and drugs administration).

Bayer ac'h enrolle klemmarc'hioù pratikoù, met evit an darn vrasañ dioute, ne zisklêrie ket anezho⁸. Uhel mat eo ar sifroù : adalek 2007 e kresk ar



Savadur Bayer e Lyon.

Juliette Cabaco Roger

6] Declaration of Alycia A. Degen in support of defendants' motion for summary judgment, or, in the alternative, for summary adjudication (Valerie George), Superior court of the State of California for the countu of Alameda, 24 a viz Ebrel 2020

7] Declaration of Alycia A. Degen in support of defendants' motion for summary judgment, or, in the alternative, for summary adjudication (Valerie George), Superior court of the State of California for the countu of Alameda, 24 a viz Ebrel 2020

8] Declaration of Alycia A. Degen in support of defendants' motion for summary judgment, or, in the alternative, for summary adjudication (Valerie George), Superior court of the State of California for the countu of Alameda, 24 a viz Ebrel 2020


Signalements de matériovigilance reçus à l'ANSM

➔ 4693 signalements entre 01/01/2003 et 31/07/2022

Dont 289 avant 01/01/2013 (soit 26 /an)

Hors signalements issus de la presse grand public ou de publications scientifiques

Evolution mensuelle entre 01/01/2013 et 31/07/2022



*N'eo ket bet tennet
an ensteudoù eus ar marc'had
gant Ajañs ar yec'hed.
Ha zoken 'oa kalz a verc'hed o
klemm abalamour
da wall efedoù.*

c'hlemmarc'hioù d'un doare ingal bep miz⁹. En 2008 e ro da c'houzout d'an embregerzh an den en karg d'ober war-dro ar c'hlemmoù dre vras e ti Conceptus ez eus ezhomm un den mann nemet d'ober war dro Essure da dalañ ouzh ar c'hresk¹⁰.

Eus miz Genver 2008 betek miz Mezheven 2010 en deus resevet Conceptus 16 581 klemm¹¹, anezho n'eus ken nemet 182 a zo bet treuskaset d'ar penna-durezhioù yec'hedel. Eus miz Genver 2008 betek miz Mae 2013 e resev an oberour 15 klemmarc'h bemdez dre geidenn mann nemet evit an ensteud Essure. « An niver a glemmarc'hioù a zo ramzel. Evidomp-ni, ma vez reoù bemdez evit ur produ ez eus ur gudenn vras », a zispleg hon arbennigour deomp. Adalek 2010 ha 2013 da heul e c'houlenn an FDA digant Conceptus kreñvaat mererezh ar c'hlemmarc'hioù, ha danevellin gwelloc'h an darvoudoù d'ar penna-durezhioù yec'hedel.

Abegin 'ra Conceptus ar mererezh fall-mañ dre ziuver

a implijidi. Un diell diabarzh da vBayer a ziskouez e ouie implijidi e oa mankoù evit treuzkas ar gwall-zarvoudoù hag o doa kemennet d'an embregerezh e c'hellfe degas ur harzh da aotre an dafariad.

Eus tu Europa eo bet sachet an evezh ivez : da heul ur strollad atersadennoù o tiskouez ne oa ket bet treuzkaset gant Bayer an disterañ gwallzarvoud diwar 142, an aozadur iwerzhonat NSAI (National standards authority of Ireland) a denn, an 10 a viz Gouere 2014, a-pad 90 devezh, ar sielladur CE diwar an dafariad mezegel Essure. « *Dav eo resisaat, n'eus ket, d'ar poent-se, lakaet war evezh an ANSM a feur an darvoudoù-mañ* », eme ministrerezh ar yec'hed gall en un diell justis¹². An NSAI a c'houlenn titouroù ouzhpenn o kas an ehan siellerezh da echuiñ an 9 a viz Gwengolo 2014.

Un eil gwech e vo lakaet war evezh en 2015 : an ANSM a dreuzkas da vBayer un danvez-lizher o reiñ da c'houzout soñj an ANSM tennañ Essure diwar ar

9) Declaration of Alycia A. Degen in support of defendants' motion to exclude testimony of Dr. Kimber C. Richter on Sargon grounds, Superior court of the State of California for the countu of Alameda, 24 a viz Ebrl 2020

10) Declaration of Alycia A. Degen in support of defendants' motion to exclude testimony of Dr. Kimber C. Richter on Sargon grounds, Superior court of the State of California for the countu of Alameda, 24 a viz Ebrl 2020

11) Declaration of Alycia A. Degen in support of defendants' motion to exclude testimony of Dr. Kimber C. Richter on Sargon grounds, Superior court of the State of California for the countu of Alameda, 24 a viz Ebrl 2020

12) Postel eus ministrerezh ar yec'hed da prezidant lezvarn melestradurel Lyon, 19 a viz Meurzh 2021


marc'had goude bezañ bet enrollet 1000 efed a-eil gant 2 600 klañvourez ensteudet. An evezhioù kentañ-mañ o defe gallet degas disfiz eus perzh ar pennadurezhioù gall. Koulskoude ne lavarint grik war gwerzh ar produ.

Abaoe 2008 en deus cheñchet ar sistem testeniekadur, kreñvaet eo bet. Met e-giz ma tislep hon c'hen-seurted eus ar *Monde*, al lobbierzh start eus perzh industriezh ar sektor o deus miret ouzh ur cheñchamant don¹³. Da skouer ez eo bet nac'her krouidigezh un ajañs ofisiel testeniekadur kreizennet, padal en defe miret da reiñ ar galloud-se da embregerezhioù prevez.

Digor bras an nor da Essure e Frañs

Er c'henarroud lezennel european lez-ober mat, n'eo ket digeriñ doriou ar marc'had d'an ensteud Essure a ra Frañs nemetken. En desped d'ar faziou anat e doser an oberer¹⁴ (lennit « *Un dezrevell tasmant gant an ANSM a lak douetañs war surentez an ensteud* »), e vez digoret bras an nor gant degemer : ouzhpenn kaout un TVA digresket a 5,5 %¹⁵ evit skoazellañ « *an nevezinti mezegel* », eo bet roet an aotre gant an HAS e vo restaolet penn-da-benn an holl vaouezed adalek 2012. Ken abred hag ar bloaz 2005 e oa restaolet Essure d'ar maouezed ne oa ket aliet dezho argoulm ar c'horzennoù¹⁶.

Ar berzh a c'heller displegañ evit ul lodenn gant an interestoù arc'hant. Evit argoulm ar c'horzennoù e vez ezhomm mont d'an ospital ha kaout ezhomm un diaraezñ hollek pa n'eus ezhomm mann nemet 15 munutenn, hep araeziñ na mont d'an ospital evit an



DR

Levr diwezhañ war ar sused-mañ zo *La santé en bande organisée bet skrivet gant kazetennerez Anne Jouan. Kontet 'vez istor Christian Riché a laboure e Ajañs ar yec'hed.*

dafariad Essure.

En un ali eus Bodad priziañ ar produioù hag oberioù en 2007, e pouez an HAS war ar spletoù en deus an ensteud Essure, ha dreist-holl « *Un digresk an niver a dud o vont d'an ospital* », hag « *un digresk ar prantad ehan a-raok kaout oberiantizoù prevez pe micherel en-dro* ».

Ha pa eo gant bolontez vat, reiñ tro d'an holl maouezed da gaout an hilastaliañ peurbad ma kar dezho, e oa an dibab bet graet, kemer an ensteud-se, e c'heller enebñ pa seller ouzh ar pezh a erru : hiziv, hervez ar sifrou diwezhañ embannet gant ar pennadurezhioù yec'hedel, ez eo ouzhpenn 30 000 gant un ensteud o deus lakaet tennañ anezhañ war goust tennañ o uterus oe o c'horzennoù, da lâret eo tost da 15 % ar maouezed gant un ensteud e Frañs¹⁷.

An ANSM, a zo sañset bezañ un diwaller, en defe gallet, en anv ar galloud polis yec'hedel en deus,

13] Stéphane Horel, « Comment le lobby des implants médicaux a fait plier la Commission européenne », pennad *Le monde*, 27 a viz Du 2018

14] Stéphane Foucart, « Implants contraceptifs Essure : les soudures à l'étain mises en cause », pennad *Le Monde*, 22 a viz Kerzu 2020

15] Postel eus Stéphanie Charles da Splann I, 19 a viz Genver 2022

16] Ali komite broadel eus e-karg d'an ensteudom medisinn, rentañ-kont war « Essure, dispositif pour stérilisation tubaire par voie hystérocopique », ali, Penn Braz ar yec'hed, 29 a viz Mae 2012

17] « Essure : bilan des signalements de matériovigilance reçus à l'ANSM entre 01/01/2013 et 31/07/2022 », ANSM

herzhel an dafar. Met heñvel ouzh ar sistem european, evezhierzh an dafarioù mezegel gall – anvet matériovigilance pe danvezevezhiañs -, a zo ivez danvez burutelladennoù niverus¹⁸. Memes ali zo gant Thierry Thomas, den e-karg eus an ensteudoù en ANSM : « *goueout a reomp n'eo ket ar matériovigilance un poelladenn peurvat. Ne 'oa ket ganeomp d'ar mare-se a-walc'h a titouroù a-benn ma vefe tennet an ensteudoù eus ar marc'had* ».

Ur sistem evezhiañ gant mankoù

« *Darn vrasañ an disklêriadennoù danvezevezhiañs a vez dielfennet gant ar pourvezer peogwir ez int int-arbennigourien barrek d'hen ober* », eme Yves Lurton, kenskriver rannvro an danvezevezhiañs e pennospital skol-veur -CHU1 Roazhon. Disklêriadennoù a n'int ket emgefre, evel m'eo bet gwelet ganeomp. An ANSM a vez o c'hortoz war-lerc'h an dud a-vicher evit rentañ kont an darvoudoù liammet gant dafar mezegel, met en tu-hont da se c'hoazh.

Un dreuzell-all, ar genskriverien lec'hel, anvet er pennospitalioù, a renabl an diskleriadennoù efedoù angortozet. Daoust ma vez ar redi gant an dud a-vicher e bed ar yec'hed disklêriañ kement degouezh grevus, n'eo ket heñvel evit an efedoù a-eil. Neuze ne vez ken nemet disklêriañ anezho dindan tri miz hep an disterañ redi an taol-mañ¹⁹.

Setu, eta, ma anzav darn vrasañ ar c'hinekologourien bet aterset ganeomp : ne vezont disklêriet nemet ral-ral a wech. « *N'em eus ket bet titouroù resis war an doare da ober. Gouzout a ouzon eo ret disklêriañ met*

n'ouzon ket re penaos », eme ur c'hinekologourez eus Lille, Géraldine Giraudet. « *Ezhomm 'vez tri c'hard eur evit ober un disklêriadenn, n'eo ket un teuliad bihan da leuniañ...* », eme ar mezeg hollek Sylvain Bouquet, en deus kemeret perzh er Bodad Skiantel en doa priziet an dafariad Essure en 2017²⁰.

Evit Essure e c'heller kaout douetañs eus efedusted an disklêriañ efedoù a-eil muioc'h c'hoazh pa vezont peurliesañ o tont war wel e lec'hioù disheñvel mat eus al lec'h ma oa bet preder (poan benn, divarregezh da virout troazhañ, kudennoù da sevel pe fiñval, ekzema, hag all ...). « *Neuze kemer tri c'hard eur evit un dra bennak ha «n'eo ket liammet...»* », eme Sylvain Bouquet.

Em-virout da embann, diouer a amzer evit lod, anaoudegezh fall an doare da ober an disklêriadenn evit lod-all... Ar c'henskriver lec'hel breton Yves Lurton a stad ez eus nebeutoc'h a zisklêriadenn

noù eget ma ne vefe sañset : « *Ar vedesined ne ziskêriont ket ingal, a-wechoù e kav dezho eo lod eus an efedoù deskrivet- padal e tlefe bezañ disklêriet -, pe n'o deus ket c'hoant da ober paperajoù.* » Ouzhpennet 'vez

gant Thierry Thomas, denn e karg eus an ensteudoù en ANSM : « *An darn vrasañ eus an efedoù 'zo bet diskleriet gant ar merc'hef ha pas gant ar medisined. Ral tre eo* ».

Roadennoù disfizius o deus beskelled ar studiadennoù

En desped d'an is-disklêriañ anavezet mat²¹, ez eo aet bodad skiantel berrbad an 19 a viz Ebrel 2017 bet anvet gant an ANSM (lennit ivez « *Un dezrevell tasmant*

18] Julien Borowczyk, Pierre Dharréville, rapport d'information parlementaire, commission des affaires sociales, miz Meurzh 2019

19] Code de la santé public, sous-section 3 : Obligations de signalement, Articles R5121-170 à R5121-177, site web de legifrance

20] Komite skiantourien eus an ANSM «...», 3à a viz Mae 2017

21] Chloé Hecketsweiler, Stéphane Horel (avec Simon Bowers (ICI) et Jet Schouten (Avrotros), « «Implant Files» : un scandale sanitaire mondial sur les implants médicaux », pennad Le Monde, 25 a viz Du 2018



Savadurioù an ANSM
e Pariz.

gant an ANSM a lak douetañs war surentez an ensteud ») da harpañ hep tamm douetañs ebet war « *ar bilañs roadennoù danvezevezhiañs* », e lec'h ma vez roet da c'houzout deomp ez eus 1.177 disklêriadenn o lakaat Essure e liamm gant ur falldegouezh, eus deroù ar bloaz 2003 betek miz C'hwevrer 2017.

Ha setu an dezrevell da glozañ evel-hen « *Roadennoù al lennegezh, an evezhierezh ha disoc'hoù ar studiadenn reuziadonel, ouzhpenn 100 000 maouez enni, ne lakaent ket abeg er c'hempouez gounidoù/ riskloù gant an ensteud-mañ* ».

An danevell beskellek-se a vo pennabeg an ANSM da chom hep kemer darbaroù da vevenniñ implij an ensteud Essure e Frañs. Memes doare da ober gant Bayer a ro soñj deomp « *n'eus ket bet anv gant an ANSM betek-hen eus elfennoù o lakaat en arvar ar c'hempouez gounidoù / riskloù evit an ensteudad Essure*

ha dalc'hmat ez eo bet skignet keleier sklaer ha klok diwar-benn an ensteudad en ur toujañ d'al lezennoù ». Hirie an deiz, ne oar ket miliadoù a vaouezed e Frañs, moarvat, e c'hell gant ur riskl bras bezañ efedoù a-eil gant an ensteudoù Essure o deus en o c'horf. Daoust ma oar ar pennadurezhioù piv eo ar maouezed gant seurt ensteudad diwar roadennoù yec'hedel pep hini e nac'hont kelaouiñ anezho, kuit da gaout « *pennfol-lerezh* », diouzh lâret meur a c'hinekologour. « *N'on ket evit gouzañv seurt prezeg* », eme Sidonie Revillon, skiantourez Brest o labourat war dilerc'hioù seurt ensteudoù. « *Piv a c'hell krediñ d'un doare sirius ez aio ur vaouez da dennañ ec'h uterus mann nemet evit ar c'hoñfort, pe peogwir he deus douetañs tra ken ?* »

**Juliette Cabaço Roger
et Faustine Sternberg**



Essure : buhez torret ar merc'hed

Splann ! ha *Jet FM* a ginnig deoc'h selaou istor an ensteudoù Essure dre istor ar merc'hed o 'deus bet anezho.

E-pad hon enklask eo bet kejet gant merc'hed da biv eo bet lakaet ha tennet kuit an ensteudoù Essure. Kontet o 'deus o istor ouzh mikro Rozenn Le Carboulec. Isabelle, Sophie ha Nathalie, teir Breizhadez a zispleg deomp penaos eo bet kaout an ensteudoù en o c'horzennoù. Un hent hir ha poanius, met leun a spi.

Ur podkast da selaou mañ:
<https://splann.org/essure-podcast-femmes-cobayes/>

Kenbroduet eo bet ar podkast-mañ gant *Splann !* ha *Jet FM*.

Atersadennoù hag enrolladennoù : Rozenn Le Carboulec

Frammañ ha realizañ : Julie Auzou

Aozadur : Juliette Cabaço Roger ha Faustine Sternberg



Lakit hoc'h anv a-benn degemer al lizher-kelaouiñ !

Dedennet oc'h gant ar pezh a c'hoarvez er vro ? Gant an endro hag al labour-douar ? C'hoant 'peus bezañ titouret pa 'vez embannet un enklask gant Splann! ? Gall a reoc'h heuliañ ha souten ac'hanomp en ur lakaat hoc'h anv a-benn degemer hol lizher-kelaouiñ bep miz war www.splann.org

Klevet 'peus kaoz eus *Splann* ! ?

Splann ! a zo ur gevredigezh (mod lezenn 1901) a zo he fal dezhi kas da benn enklaskoù-kazetenniñ poellek evit an dud e Breizh hag ar bed, e galleg ha brezhoneg. E Bro-Dreger, e Gwengamp, emañ staliet.

Erruet eo *Splann* ! d'ur mare eo diaesoc'h diaesañ ar jeu evit ar gazetennerien. E Breizh, ouzhpenn 500 kazetenner o doa sinet ul lizher digor kaset d'ar rannvro e 2020 : ganto e oa bet embannet sklaer ez eus diaezamantoù bras evit titouriñ mat an dud diwar-benn industriezh gounez-vouedel ar vro. Kement se a zo, evel-just, chalus-tre evit ar geodedourien. Soutenet eo bet al lizher-mañ gant 50.000 a dud.

Kazetennerien 'vez paeet gant *Splann* ! a-benn kas enklaskoù don war an hir-dermen. Pep tra a-drugarez d'ar re a harp ar gevredigezh. Embannet e vezont digoust war he lec'hien ha gant mediaoù a genlabour gant *Splann* !

Ur media dizalc'h...

Muioc'h mui e teu da vezañ mediaoù gall e daouarn tiez-bank hag embregerezhioù bras. Ar c'hontrol-mik a vez graet gant *Splann* ! Arc'hantaouet e 'vez an enklaskoù gant ar geodedourien 'zo kizidik ouzh frankiz ar c'hazetenniñ.

Tost an holl arc'hant 'vez tapet gant *Splann* ! 'zo bet roet gant an dud, en linenn pe dre chekenn. Gall a ra ivez bezañ arc'hantaouet gant kevredigezhioù all a zo kizidik ouzh frankiz ar c'hazetenniñ, pe gant yalc'hadoù 'zo. Met ne 'vez ket degemeret arc'hant na digant embregerezhioù, na digant strolladoù politikel, na yalc'hadoù digant strollegezhioù lec'hel. Gant *Splann* ! 'neus ket na perc'hener pinvidik na bruderezh na kevranegerien (actionnaires, en galleg). Ur c'homite evezh a ra war-dro eus pelec'h e teu an arc'hant a-benn ne yafe ket a-enep karta embann *Splann* !

... hag a zifenn an enklaskoù war an hir amzer

Aet eo da vezañ primoc'h-primañ bed ar c'heleier. Ganeomp-ni 'vez difennet ur c'hazetenniñ war an hir-amzer a-benn lakaat ar gaoz war sujedoù kizidik e Breizh. O chom er vro emañ kazetennerien *Splann* ! Eus Naoned betek ar Gerveur ha Lannuon e 'vez furchet ganeomp a-drugarez d'an titouroù kaset deomp hag hon labour bemdez.

Krediiñ a reomp o 'deus ezhomm ar geodedourien eus enklaskoù don ha sirius a-benn ober o soñj dezho war ar bed. Un doare da reiñ ostilhoù a-benn kompren enkadenn sokial, an endro hag an demokratelezh.

Gwriziet mat eo *Splann* ! E Breizh. Anat eo e 'vez soutenet ar brezhoneg a zegas pinvidikaez hag ur sell disheñvel en hol labour. An holl enklaskoù 'vez embannet en div yezh d'an nebeutañ.

Ur stumm kevredigezhel

Splann ! 'zo ur gevredigezh lezenn 1901 hag eo dreist-holl dre dud a-youl vat ez a en-dro. En holl, 25 den ouzhpenn 'zo abaoe eo bet krouet *Splann* !, tro-dro da 15 anezho 'zo kazetennerien. Setu an dud a gemer perzh en emvodoù-meur hag o 'deus droet da votiñ. Klask a reomp e vefe ar muiañ demokratel posubl mont en-dro ar gevredigezh.

Gant ar c'huzul embann 'vez dibabet sujedoù an enklaskoù hag ar gazetennerien a vo o labourat warno. Gant ar c'huzul-se vez roet skoaz ouzh ar gazetennerien 'zo oc'h enklask. Mont a ra ivez en darempred gant ar mediaoù a embanno pe skigno ar pennadoù. Kazetennerien a-vicher indi ar re a gemer perzh er c'huzul-embann. Dilennet e vezont gant izili ar c'huzul-merañ hag, izili ar c'huzul-surentez.

Gant kazetennerien pijisted 'vez graet an enklaskoù 'zo bet dibabet gant ar c'huzul embann.

Ober war-dro mont-endro *Splann* ! a vez graet gant ar c'huzul-se. Pep dilennad a zo par d'ar re all a-fed pouezh ha kargoù. Gant bodad-meur ar gevredigezh e vezont dilennet.

Ezhomm 'neus ac'hanoc'h Splann !



► A-benn goprañ kazetennerien, tresourien, fredoù-hent hag all 'neus ezhomm ac'hanoc'h *Splann* ! Tro-dro da 20 000 euro a goust un enklask. Pemp a 'zo bet embannet evit poent a-drugarez d'ar pezh 'zo bet roet gant an dud.

► M'ho 'peus c'hoant e vefe kendalc'het da vevañ ar c'hazetenniñ dizalc'h e Breizh, harpit ac'hanomp !

Gall a reoc'h reiñ el linenn war <http://www.helloasso.com/associations/splann/collectes/splann-campagne-de-levée-de-fonds-2022> dre chekenn pe an ti-post.

Kas ur chekenn deomp

« Da *Splann* ! » eo dav deoc'h skrivañ war ar chekenn ha kas anezhi da *Splann* !,

3 plasenn Maez ar Roue, 22200 Gwengamp

Titouroù da gas deomp ?

Titouroù pouezus evit ar gevredigezh 'zo ganeoc'h ? Dokumantoù kizidig pe danvezioù e rankfe *Splann* ! enklask diwar o fennoù ?

Kasit deomp ur postel kentañ gant ur chomlec'h hep hoc'h anv (gant un anv fals ma karit) a-benn displegañ deomp eus petra 'zo kaoz berr-ha-berr. Gwelloc'h eo implijout posteloù evel Protonmail. Respontet 'vo deoc'h penaos ober evit kenderc'hel an tabut ha kas deomp an dokumantoù.

Mont en darempred

contact@splann.org

Splann !, 3 plasenn Maez ar Roue, 22200 Gwengamp

Adkavit ac'hanomp war ar rouedadoù sokial :



@Splannenquetes



@Splannenquetes



Splann lanceur
d'enquêtes



@Splannenquetes



Splann

Splann!
Ti ar Vro
3, plasenn Maez ar Roue
22 200 Gwengamp

Penn rener an embann
Alain Goutal

Kazetennerien
Faustine Sternberg,
Juliette , Guy Pichard

Poltredoù
Guy Pichard, Juliette
Cabaço-Roger

Lakaet brav da lenn
Anne Caillet

Adlennadenn
Julie Lallouët-Geffroy
Juliette Cabaço-Roger
Faustine Sternberg

Moulet e
Cloître
ZA Croas-ar-Nezic
29 800 Saint-Thonan

Embannet ofisiel e :
trimestr kentañ 2023

ISBN : o vezañ graet